

Var don : Ar Pillaouer.

Eun torrad brini discoachet
Deuz coajou bras Landerne (*bis*).
Var hon douarou diskennet
Neuz c'hoant da beillet Kerne : (*bis*)

390

REFRAIN

Bec'h d'ar lapouset divalo
Zo klask dismantra hor bro ! (*bis*)

Simon, Goasguenn, ha consortet,
Evit laerez hor moueziou (*bis*)
N'em lak gwir republikanet
Pe dal eo guenn ha lostou (*bis*).

REFRAIN

Gant ho zeodtou flour, alaouret
Na c'houlent met mad an oll : (*bis*)
Mar selaouomp ar leonardet
Vidomp va ar goassa koll (*bis*)

REFRAIN

A viskoas n'eunt ben kendalc'het
Kaout doujans vit ar roue (*bis*)
Breman c'hoas evel trubardet
C'hoarient dre guz bemde (*bis*)

REFRAIN

Ia, dre zindan a labourent ~~labourent~~
Vit hor plega, vel guec'hal (*bis*)
Hon lakat da gerzet en hent
Gant eur c'habestr, eun hual (*bis*)

REFRAIN

Diualomp eta da heulia
Potred Brest ha Landerne (*bis*)
Divroidi deuz ar falla
Zo klask touza tud Kerne (*bis*)

REFRAIN

Biken na rafomp hor moueziou
Da vevelien ar roue (*bis*)
D'ar Goasguenn, digor he c'henou
Vit hor lonka didue (*bis*)

REFRAIN

LAOUIK KERAHES.